

EN NA FOLL

Louarnig

31 a viz Here



HALLOWEEN E BRO vMEC'HIKO

P.3 PETRA 'NEVEZ ER BED ?



P.4-5

HALLOWEEN E BRO-VARC'HIR

P.8-9 MASKLOÙ DA BRIENTIÑ

EVIT SPONTAÑ AR RE ALL !

P.6 *titeuf*

P.11

MEURIAD

P.12

NAGGENEEN

P.13-15

Paotr Louarn



« Sandrine, perak e ra ar marmousien jimnastik er gwez ? » *Curvan*



Gwir eo : ovesk* eo ar marmouzien. Ret eo dezho bezañ barrek evit krapat er gwez rak o enno vevañ eo ! Lammat a reont gant liantiz eus ur wezenn betek ur wezenn all. Lod ne ziskennont james betek an douar, ar gibboned, da skouer.

Pa vez gwelet marmouzien en ur ZOO e c'heller krediñ e reont jimnastik. Fentus ha fromus alies eo gwelout anezho. Ret eo dit ijinañ o buhez e laez gwez uhel ar c'hoadoù evit kompren an emzalc'hoù-mañ. Lammat eus ur wezenn d'eben, en em adtapañ gant un dorn d'un droellenn, implij e lost evel ma vefe ur pempvet ezel, istribilhañ gant ar penn d'an traoñ evit tapout boued. Tout an traoù-mañ o deus desket dre forzh bevañ er gwez.

Penaos e ra ar marmouzien evit krapat buan ha brav er gwez ? Divesker ha daouarn kreñv, bizied a c'hell implij evit kemer tra pe dra ha bizied-treid gouest da dapout krog er brankoù.

Kenavo ar wech all !

Sandrine

*Bezañ ovesk : dont a-benn da blegañ aes e gorf

PETRA EO AR VIRUS EBOLA ?

PETRA NEVEZ ?

Anavezet zo bet ar virus 40 vloaz. Adkroget en deus ar virus da redek abaoe miz Eost. Tremenet eo e broioù all war aodù ar c'hornôg : Ginea, Liberia, Sierra Leone. Morse n'eo bet ken prim ar c'hleñved o redek. Muioc'h eget 2000 den a zo marv dija.



Er penn-kentañ tout e teufe ar virus eus an eskell-groc'henn, ar marmourzed ha loened all a vez debret gant an dud. Da-heul e c'hell mont eus unan d'unan all buan-tre.



Evit ober war-dro ar re glañv eo ret en em wiskañ gant dilhad a c'holo ar c'horf en e bezh. N'eo ket bet kavet c'hoazh un doare efedus da louzaouiñ an dud gleñv na da lakaat ar c'hleñved da chom a-sav.



Ha te, petra 'soñjez diwar-benn ar c'hleñved Ebola, diwar-benn Bro-Skos ?
Respont war ya-ouank.com pe dre bostel da camille.kvb@orange.fr hag e vo embannet !

BRO-SKOS DIZALC'H ?

D'an 19 a viz Gwengolo zo bet dalc'het ur referendom e Bro-Skos. Ur referendom a zo ur goulenn savet ouzh ur bobl ha da bep hini da respont gant YA pe KET d'ar goulenn bennaket. Sed'aze ar goulenn zo bet savet ouzh ar Skosiz :

HAG-EÑ E TLEFE BRO-SKOS BEZAÑ UR VRO DIZALC'H ?

55,3 % o deus respontet « ne zlefe ket », setu e chomo Bro-Skos e-framm ar Rouantelezh-Unanet, ar « United Kingdom » evel ma vez lavaret e saozneg.



i viva MEC'HIKO !



Bleuñv e-leizh a vez gounezet e Bro-vMec'hiko. Plijout a reont kalz d'ar Vec'hikaned. Da vare deiz an dud varv e vez gwelet bleunioù e pep lec'h.

Livioù flamm a vez gwelet alies war ar mogerioù. Kazi an holl Vec'hikaned a gred en Doue, kristenien int.



Galetes maiz, traoù lipous enno, a zo e-touez ar predoù muiañ karet gant ar Vec'hikaned. Quesadillas a vez graet eus ar re-mañ : keuz a zo e-barzh ha traoù all a c'heller dibab da lakaat.



DEVEZH AR RE VARV


Bep 31 a viz Here, tost er bed a-bezh, e vez lidet gouel an dud a zo marv. Halloween a zo an doare amerikan d'en ober. E Bro-vMec'hiko eo « *El día de los muertos* ». Ur fest vras eo : mont a ra an holl dud er vered. Kinklet e vez ar beziou gant kuru-noù-bleuñv, ha debret hag evet e vez war un dro.



Deuet eo ar pennoù-marv da vezañ arouez ar fest-se. « *Calaveras* » a vez lâret outo e spagnoleg. Livioù splann zo warno ha kouignoù-sukr a vez fardet zoken.



Sombreros a vez graet eus an tokoù-mañ. Gwareziñ a reont diouzh ar bannoù heol tomm-berv !



titeuf

ur sach-skol
nevez

UN TAMM BRAV A GALANNA AZ PEUS BET GANT YANNIG... KEN EMBERR ...



KENO !



SELL AMAÑ ! UR PETRA DIN-ME ? ...


... UR C'HORRIG GANT UN DORNELL !

OUC'H OUC'H !



GWALL AKOMOD EO AR GAO C'HADENN HEZOUG-MAÑ !

OUC'H OUC'H !



SETU ! UL LUTUN-BALL, KREDAPL... SELL ! PAKAÑ A RI ANEZHAÑ !

KAO C'H ! C'HWITET !

OUC'H OUC'H

★ BAOÑ



... PE NEUZE, PLANTAÑ TRO ENNAÑ, HA SETU-EN TRE ER GOUR-EGOR...

TIUUW

OUC'H OUC'H

TIUUW

TIUUW



BRAV ! CHEÑCH LIV EN DEUS GRAET ! UR C'HAER A VITRAK, YA !

OUC'H

OUC'H



KEN AR C'HENTAÑ !

COOL, DA SAC'H-SKOL !



♪ HAPPY BERRZDAY TOU YOUUU ♪

ME A GAVE DIN E VIFFEN BET DI FANMET DIOUTAÑ PA'M BOA ROET ANEVHAÑ DA YANNIG...



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »
b-heol.com

BANNOÛ-HEOL

HALLOWEEN GANT AR VEC'HIKANIZ !




Tro ar bajenn
ma kredez !



AR MASKL-MAÑ A C'HELLEZ
LIVAÑ HA DIDROC'HAÑ

AR MA
« CALAD




Lak ur stirenn da
vont eus un toull
melen d'an eil toull
evit ma talc'hfe
ar maskl war da
benn.

Stummoù bleuñv,
kalonoù, kelc'hioù,
gwagennoù
a vez implijet
ganto.

o dremm diwar tres ur penn-marv.
ur maskl damheñvel !


SKLOÙ
VERAS»

HEMAÑ A C'HELLEZ TRESAÑ DA-UNAN
A-RAOK DIDROC'HAÑ ANEZHAÑ




Diwall mat : heñvel
e tle bezañ
stummoù un tu
ouzh stummoù an
tu all.

Tenn ur poltred ouzhit
gant da vaskl !
Embannet a vo tout ar
poltridi el Louarnig o tont .





Ur profig a yelo gant
ar maskl bravañ ha
spontusañ war un dro !

Dit da c'hoari !



Kas da boltred da
camille.kvb@orange.fr
pe da Louarnig, Keit Vimp Bev,
22 grand rue, 29520 Laz





DIOUZH AR MINTIN E VOE
DIHUNET NAGGENEEN GANT
TROUZIÙ UL LABOUS.


SHANK
SHANK



PA ZIGORAS E ZAOLAGAD E WELAS
FLUÑV GLAS AL LABOUS-SE O VONT
DIWAR-WEL A-DREÑV D'UR WEZENN.




HA NAGGENENN DA DOSTART GOUSTAD, C'HOANT
GANTAÑ GWELET AL LABOUS BRAV-SE.



AET QA AL LABOUS DIWAR-WEL AVAT !



REDEK A REAS MEUR A WECH TRO-TRO D'AR WEZENN, O SOÑJAL
E C'HOARIE AL LABOUS GANTAÑ.



BENN-AR-FIN E CHOMAS A-SAV : AR PEZH
A WELAS NE DENNE KET OUIZH UL LABOUS
DAQUST DEZHO KAOUT FLUÑV BRAS HA GLAS.



PUCKWOODJENIED A DA. SELLET A RAENT OUIZH AL LEPRECHAUN BIHAN,
GWENN-KAÑV E GROC'HEN, DIFIÑV HA NOAZH-RAN ANEZHAÑ.



POAN
MEUS EM
PAOUARN...

... HAG
EM ZREID !

HAG E PEP
LEC'H !
PAQUEZIT
GANT SE !

PETRA
EMAOCH
OC'H OBER
DIN ?

CHO CHO !
GOULEANNOU
GOULEANNOU

HERVEZ-
OUT ?
PETRA
SANTER ?

EMAOCH...
O TREN
'CHANON
DA ZEN-
BLEIZ !

DA
ZEN-
LOUARN
KENTOC'H.

DIWALLIT :
BARNEREZ EO
MA MAMM !
M'HO PEUS ROET
DRAMMOÙ DIN, E RIN
PEADRA DA GLOZAD
HO STAL !

HA BREMAÑ,
LAOSKIT
AC'HANON DA
VONT KUIT,
PE... PE E
SKOIN!

redin a ra Paol eo bet strobinnellet gant louzon. Barnerez eo e vamm setu e c'hellje
ar strobinneller en toull-bac'h.

Gouzoug-ou dichek : fellout a ra d'ar strobinneller lavar e tlefe Paol chom hep bezañ
fleuz outañ peogwir eo ur strobinneller barrek ha brudet.



KLEVOUT
A RIT, LOEN
FOLL ?

TENNIT
HO TAOUARN
A-ZIWAR MA
DIV-
SKOUARN.



DOUGET
O DEUS MANTELL
IMPALAER KELC'H
AN DIABARZH.



HA MA
PAOUARN
...

... O DEUS
KLOZET
SARKEOU
ROUEP.



HA FLASTRET
DIBOAN
GOUZOUNGOU,
KET KEN DICHEK
HAG HO HINI.



ROIT
PEOC'H
NEUZE.



DIZALE
E C'HELLOC'H
MONT KUIT.

PEOGWIR E VO
PAREET HO
TAOULAGAP.

HAG UN DONEZON
EM EUS
TREUZKASET
DEOC'H WAR UN
DRO...

HA DRE MEO AN
DONEZON-MAR
RAL...
... HA
PRIZUS !

RET E VO DEOC'H
PROUIN
OC'H
DELLEZEK.

DALCHIT
PENN OUZH HO
DROUK-
SPEREDOU.

DA GENTAÑ
OUZH
AR C'HWIL
A ZOUG ENNAÑ
HO ANKEN DON.

DA-HEUL OUZH
AR SOURD
A VEU HAG A GOUSK
EN TAN.

HAG OUZH
AR BOUCH.
EN EO HO
KOUNNAR A ZO
ENNOCH ABAOE
MOCH BUGEL.

AON HA
KOUNNAR
O DEUS
BOUETRAET
HO KASONI
OUZH AN DUD
DISHEÑVEL.

STUMMAO A REONT
AN DEN EZ OCH
HIZIV.

DISTRUJAR
ANEZHO A
DALVEZFE KEMENT
HA CHERCH
HO TOARE-DEN.

DAOUST HAG-EN E
FELL PEOC'H
CHERCH ?
AZE MAO AN DALCH.

E GWIRONEZ,
KAROUT A RIT
ACHANOCH ?

HAG HO
TUD ?

HAG AON
FO
HO PUHEZ-
PAD ?

SERRIT
HO
PEG!

UN NIVER...

-89,2

DEREZ

a zo ar gwrezverk
izelañ
bet war an Douar !


**KRAK HA
BERR**

Traouigoù pe
titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !
Kas ur postel da
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ...


D'AR **31**
A VIZ HERE




e vez lidet ar re varv er bed
a-bezh gant an dud Gristien.
Gouel an Hollsent pe
Halloween, a vez lâret. Ha te,
petra `rez d'an deiz-se ?

HA GOÛT A REZ...

eo ar gweparded
al loened a c'hell redek
ar buanañ er bed...
betek 110km/e !



PETRA EO ?!



Ur vi gwelet eus an nech.

SIFROÙ ROMAN

MMXIV

Peseurt bloavezh zo
skrivet amañ ?

Daou vil pevarzek.

YEZH AR SINOÙ


Evit sinañ
« **KENAVO** »



Sav da zorn dehoù ha
pleg da vizied 3 gwech.

BRAMMOÙ

Peseurt doare bramm
a c'hell bezañ
« an tren bihan o
vont e-biou » ?



Dit da ijinañ... ;)

DIVIN'TA

Petra zo lunedoù
gantañ ha n'eo ket
evit gwelet,
koulskoude ?



Ur fri.